

YF_0015_Al laer

Pa oan bihan e-barzh er gêr,
Ma zad, ma mamm a oa daou laer,
Ha me a oa laer evelte
Pa 'm boa desket se digante.

Bezañ laer 'zo ur vicher vad
A lavare ma mamm, ma zad,
Nemet ret eo, tapout an tu
Evit donet a-benn diouzhtu

Pa oan nemet pevarzeg vloaz
Ha me krennardig yaouank c'hoazh,
Ma mamm, ma zad 'voe dastumet
Da sul da noz gant jandarmed.

Aet e oan gante just goude koant
Daoust d'an daeroù ha daoust d'am 'foan.
Kaset e oan bet da ger Roazhon
Ha marvet eno er prizon.

Petra a rajen-me goude-se
Nemed derc'hel da voned tre
Gant hent ma zud hag o skouerioù
Evit bale war o roudou.

D'am ugent vloaz e-kreiz ma brud
Oan bet paket evel ma zud
Ha kraouiet 'oan e prizon Frên
Evit dek vloavezh pinienn.

Nend on chomet nemet c'hwec'h miz
Er prizon-se lous e pep giz.
Gant ur mignon e oan tec'het
Pell ac'hane hep droug ebed.

Bezañ laer zo ur vicher vat!
Mil bennozh d'am mamm ha d'am zad
D'am bezañ kenkoulz kelennet
D'am bezañ ken brav kenteliet.

Jakez Konan